

tad Koz



de Répertoire Breton
par Les'hec

TAD-KOZ

Yannik e oa c'hoaz bihanik en e gavel
Pa digoezaz d'e vamm gant eur c'hlenvet mervel.
E dad, chomet intanw, oa ret d'ezan labouret,
Setu d'an tad-koz Yannik e oa bet roet,
'Vel eur vamm, en e barlenn, tad-koz dougaz ar mab
Betek e di koz balen, lec'h ma c'hanaz e dad.
An ti man oa bed zavet en eur lec'hik didrouz,
Ne glever netra eno nemet kan ar lapouz,
Pe c'hoaz an dour o tirulh euz eun tammik feutenn
O c'heuil eur wazik moan, da vont trezek ar zaounienn.
Eur liorz penn an ti, kargued a we avalo,
Ar balen hag ar land, hag ar bruk er meneio.
Digaze euz ar beurez eur c'hoaz euz ar gwella
Da tad-koz a da Yannik e oa ebarz o veva.

Gant lez ar vuoc'h du, Yannick e oa bet maguet,
Hag eur wechik an amzer zoubenn ar mitonet ;
Evit e c'harz da wela aliez an tad-koz
Luskelle ar paotr bihan pa n'em gave an noz.
Leun a zoujanz evitan, 'vel eur vamm koulz laret,
Tad-koz, d'ezan, ziskaz ober e genta kaimmet ;
A pa n'em gavaz akuit da c'hallout mont e c'hunan
N'eur grena, an tad-koz zalc'he da c'heuil anezan,
Hag eur wechik an amzer e lavare da Yannik
N'ez ket ken buhan, bian, diwall da goueza, paotrik !

Yannik a greskaz eno kichen e tad-koz,
De c'heul war an deiz hag en e guichen an noz.
Karantez braz a deva an eil 'vit eguile ;
Pe blijadur, pe glac'har, diou lodenn a vije.
Pa n'em gave ar goanv, ho daou e korn an oaled,
Yannik e c'hober tann, tad-koz gant e gornieded ;
An nosvejou ken hir a vije kavet berr.
Hag araok mont da gousket e larout eur bater,
Goude, Yannik bihan pignat war ar bank kloz
Lare n'eur boket d'ezan : nosvez vad dit, tad koz !

Met allaz, an tad koz gant Doue oa bet galvet,
Lezed Yannik bihan e c'hunan ker glac'haret ;
Da di e tad e teuz ; c'heman oa c'had dimeet.
Gant he lez-vamm Yannik n'eva ket evurusted,
Paz eur gomz vad evitan, a goazoc'h c'hoaz boet fall ;
Divennet d'ezan dibri euz toll gant ar re all.
Ober a reaz d'ezan 'vel ne rer ket d'an dud,
Ne oa ken kat da wella, arru oa kaje mud.
Pa n'em gavez an noz, 'vit terri e boan spered,
Bede 'vit e tad-koz e oa ebarz ar vered.

Eun devez, Yannik bihan bet dorned goazoc'h c'hoaz,
Pa n'em gavaz an noz, dre ar prenestr e lammas
Evit kuitad 'vit atao, e lez-vamm hag e dad,
Pa ne deva evitan 'vel karantez met bac'had.
An deiz warlec'h oa klasket, ezat oa geuilh e roujou,
An erc'h oa war an douar a dougue merk e voutou.
Kavet e oa astennet he oll izili skornet
E kichen ar menn be, n'heo e tad-koz er vered.
Eno ar paour kez Yannik oa deut da glask en noz
Velt gwechall plaz da gousket e kichen e tad-koz.

TOR SEC'HED.

3 Eost 1933.

Edité par l'Imprimerie Guégo
Rue Saint-Yves - Tréguier
